

Rummen 23. — Bloavez 2

Miz Genvar 1906.

AR VRO

KELAOUENGELC'H

MIZIEK

KROUET EVIT BEZA

EUN ÆRE
ETRE

AR VRETONED
&

*Ar heol avar o savet
Keg o tirsill war Breiz-hol...*



Priz eur Rummen :

5 GWENNEK

KOUMANANCHOU :

Breiz ha Bro-C'hall : 14 real

Breiz-Veur ha lec'hiou-all : 20 real

En Gwerz en holl Stalioù Leorioù gwir vreton

KRENNAD :

*Kontadennou
Nedelek* BREIZ
Ar Skod Nedelek AR BAZ
Nedelek al Laboused KLAODA
Kantikou Nedelek
An Teir C'had KLAODA

AR VRO

Penn-Rener :

FANCH JAFFRENOU " TALDIR "

« Kaz an den ha na gar ar Vro a vag anezan »
Tennet dezuz Aliou mad Sant KADO
(*Mycirion Archeology*, levr. III., d. 40, rimel. 3.)

KRENNAD :

Efflam Kerzenan HENORET
Breiz IOUEN
An Nezerez LAOUËK
Jelvestrik AN ARCHANTER
Ar gwenili
hag ar bugel AR BRAZ

Kontadennou Nedelek

I. — NEDELEK AR BRIZONIERIEN

Breman zo c'houec'h vloa ha hanter-kant, bloavez an eil Republik, m'am beuz sonj mad, e oamp eur vanden grenarded ofred ha merc'hed kluchet var zeulioù hor boutou koat, en ro d'an tan o c'hortoz Visant koz da lakad tan en e gorn ha da gonta d'eomp eun histor benag. « C'houi, bugale, a ouelo dremaik touchant, rag Visant en deuz gwelet var an tam pouar-ma kalz a draou trist. » Hag hen mont, hag ober sin ar groaz evel eur beleg pa bign er gador.

— Da geve eun noz-man gwech-all, e vije plijadur er c'hartier-man, neketa Pierr-Mari, emez-han d'am zad? Te peuz sonj, pe oamp en oajou ar re-man, e teuez beb bloa d'ar maner, gant da dad ha da dad koz, goude koan, da glevet kontadennou arog mont d'an ofern hanter-noz. Daoust m'oa braz ar gegin, e veze enk awalc'h gant ar domestiked hag ar verourien ne vankent morse da zont da noz ar pelgent, da glask an dud jentil da vond da Geraez.

An Aotrou koz ivez, a oa eun den dreist, eur mestr deuz ar sort ne veler ket ken, ne meuz biskoaz klevet en dije chenchet eur merour, epad eun hanter-kant vloa oa bet mestr e maner Kerenor, ha dre ma kosea, e meuz klevet lavaret e ica gwelloc'h-gwell. Gwir eo, danvez awalc'h en devoa ha ne chome gantan nemet eur plac'hik vihan pevarzek pe bemzek vloa, Yvonnaik, a rea ar pez a gare deuz hi zad-koz. Ne oa ket eun den, var eul leo tro var dro d'ar maner, ha na vije ket aneet ganthi : da gement paour a gave e rea an aluzen. Ha da noz Nedelek-ta? Ar vugale hag a deue d'ar maner, da heul o zad pe o zad koz, hag o divije per hag avalou da zibri digant an dimezel, kement ha ma karent, pad ma vije an Aotrou o rei jistr da eva d'ar re vraz. Abaoue ar wech diveza e meuz gwelet an traou-ze, e maner Kerenor, zo n'ouzan ket pegeit. Er blavez daouzek ha pevar-ugent a oa gouskoude. — Te, Perik, a zo er skol, a oar an dra-ze? — Ia, Visant, c'houec'h vloa ha hanter-kant a zo abaoue. — Mad, bugale, hirio zo neuze choue'h vloa ha hanter-kant, sonj o meuz evel mar vije dec'h diveza. — Yvonnaik a roaz peb a zaou wennek d'ar vugale a dlee mont asamblez ganthi d'an ofern evit lakat e plad ar mabik Jezus. — Eno e vije klevet c'hoarz, ha kontet a bep seurt konchennoù beteg ma vije klevet ar c'hloc'h braz o son. — Neuze vat ar wazed a dape peb hini e chupen, ar merc'hed a renke o jobelinennou, hag an holl, an eil var lerc'h egile, evel saout o vont d'ar park dre ar stret c'hilaz aze. Ar Marzin, ar mevel braz a vije bepret pen arog, gant eur c'houlouen en e letern, gant aoun e vije kouezet un benag en dour pe er pri. Eaz vize goût pe vije divezad potred Kerenor, rag an Aotrou a oa eur c'haner dreist, hag e verourien asamblet en dro d'hi vank a ica d'e heul hag a leske hommou kan ken e dregerne Iliz braz Sant Treveur binniget... D'ar mare-ze, potred ker, n'oant ket evit c'hoari gant an dud war ar mez, neketa, Pierr-Mari! Brawa tra a gaven gouskoude oa gweled an dud chentil ha kalz euz ho merourien d'ho heul o vont deuz an Daol-Fask da ofern hanter-noz. Breman, ne weler ket a draou evelse. — A pa vije lavaret an drede ofern, an holl a zistroe d'ar maner da zibri an adkoan servichet d'eomp gant Glodina, a oa ker koz ha ker kam m'he doa poan o kerzat; da noz ar pelgent avad a zé c'hoaz en dro vel eur plac'h samper. C'houec'h vloa hag hanter-kant a zo abaoue, bugale... E do dija ar freuz er vro; ar veleien kalz anezo a oa tec'het kuit hag ar re all a ranke chom dindan guz, hag ar re a vije tapet, a vije tolet er prizou, hag aliez zoken lazet. Aman oa chomet ganeomp eur beleg koz deuz Lanouennek, hag a deue en noz da weled ar re glanv ha da vadei ar vugale vihan — eur c'hoar d'in-me, Jaketa, hag e peuz anveet, te Pierr-Mari, a

oa bet bet badeet e kraou-saout ar maner. — Wechou e lavare an ofern d'eomp er c'hardi; ne rea ket aliez; re dost e oa deuz a Geraez ha deuz Plouguer. Eno c'hoaz e oa eur persoun dizoue hag a vije bet kountant da lakat tapat ar beleg mad: kredi a ellit epad an ofern e vije aze tud o vond dre an hent hag ar vali, hag e vije digor o daoulagad hag o diousskouarn. Ped gwech evelato n'eo ket bet ar beleg keaz e riskl da goll e vuez abalamour d'eomp-ni? Ha potred diskiant, ma piije gwelet evel d'omp an amzer divalo-ze, c'houi rafe eur sonj all. — Nebeutoc'h evit eur bla goude, bugaligon, maner Kerenor n'oa nemet eur bern ludu!! Ar botred ru a deuz eun nozvez, var dro gweliou Kala-Goan. An Aotrou hag an Dimezel iaouank a oa tennet deuz ho gweleou. Daoust m'hen doa trivac'h vloa ha tri-ugent, hag hi netra nemet pemzek vloa, an dud divergont-ze a lakaaz chadennoù houarn en dro d'ho divrec'h ha d'ho divesker da c'hortoz m'ho dije torret ha furchet an armelioù ha laeret kement a dalvee eun dra benag. Ar mevelien, o velet eur seurt skrab, a glaskaz difen o mestr. E ber amzer e oa torret ho fenn outho a daolioù kros-fuzuil, pe a daolioù sabren. Me n'oa nemet potr-saout hag a veze o loja en eur gwele blot, er saina a zioc'h va loened; dihunet oan bet gouskoude gant an drouz hag ar c'hri-forz. « Et da guzet, Visantik, lare an Aotrou d'in, raktal m'am boa taolet va zreit dreist an treujoù, mar bezes tapet e vo great d'id evel d'ar re all ama. Ia ia, kerz founus eme Yvonnaik, kenavo er Baradoz, Visantik. » Koll a reen va fenn ha galoupad a rean evel eun den sot varzu Iliz an Itron-Varia Kleden da erbedi outho an Aotrou, hag an Dimezel. Pa oamp o sevel gant ar c'hoar a zioc'h milin ar Roue e velen an tan e maner Kerenor!! O tud fallakr! eme-ve. Hag e chomiz eno ne ouzon ket pegeit heb gwelet na klevet netra... Ter pe beder beaj e ne beutoc'h evit daou viz a rejen beleg Raouzon, ne oan ket evit lakat em fenn n'em bije ket gellet da neubeuta gwelet an dud chentil ha zoken o digas ganin adarre da Gerenor... Tro ven a riz bep tol, hag ar vourc'hijen lous-ze ne reent nemet c'hoarzin goab d'in... Edon e Raouzon evit ar bedervet tro, d'an deiz araog gouel Nedelek, pa gleviz e lize an Aotrou a Gerenor hag Yvonnaik beza barnet antronoz. Ar pez a meuz da gonta d'eoc'h, c'hoaz, bugale eo an trista, hag am beuz klevet va man gant beleg koz Lanouennek.

Abaoue an noz ma oa bet tennet deuz hi gwele gant ar botred ru, Yvonnaik a chomaz klanv. Ne ket souez, goude ar ar spontaden he devoa bet. Ha brema ta er prizou ne c'hell mui mond da redek; ne deuz nemed bouet fall da zibri ha poan spered c'hoaz gant an dra-ze, pa vel hi zad kez o tinerzi hemde. Mil boan he deuz o sevel divar he gouele, a d'ar pardaez-se pa oa digaset d'ezhi eur goz bannac'h souben drenk, ne reaz nemet glepa hi muzellou, ne zrebaz ginaouad. An Aotrou koz hag a grene gant an derjen n'em sklejas betek gouele e verc'h vihan; ia gouele eul loen mud, ne ket gouele eur c'hristen oa avad. Sonjal a rea d'ezhan e doa gellet Yvonnaik en em rei da gousket. Prestig e savaz en e c'houazez, ec'h astennaz hi breac'h varzu eur c'horn deuz ar prizou: « Tad koz, emez-hi gant eur vouez krenv, tadig koz, ne welit ket anez-ho? Hor merourien a zo o vont d'ar c'hardi varlerc'h Marzin... neuz na letern, na goulou gantan ha gouskoude eo teval an noz ha doun an erc'h... maint o vont d'an ofern hanter-noz... an aster a welan el lec'h ma veze ar c'har braz. An Aotrou persoun a zo o viska he zillad oferenna, ha goulou digant Doue ma zaimp ac'han. Tad koz, sellit ta, e maint o vont ouz an Daol Fask. » Ne lavaraz komz ebet mui: ne reaz nemet gourvez var an dornad plouz brein a oa a zindan-hi.

— O va Doue! eme an Aotrou, en eur asten he ziuivreac'h da harpa penn he verc'h vihan, o va Doue! merchanz ne lamoc'h ket Yvonnaik diganin! Ne meuz nemet-hi var an douar! Va Doue, va Doue ne laket ket ar groaz-ze var va diousskouarn, re am beuz dija da zougen! » Doue na zelaouaz ket e beden. Yvonnaik a gendalc'haz da fallat, ha da bounneraat

var breac'h he zad koz... leuskel a reaz eun huanadennik, ha Dimezel Kerenor eát da velat Doue. An Aotrou a chom evel sebezet... ne glev na ne wel... ne c'hall na klem na lenva... ne ouzou dare hag e sonj ema etre he ziou vrec'h korf maro e vrec'h vihan.

En eun tol kount, setu eur sklerijen gaer er prizoun, hag e glev eur vouez flour, euz ar seurt ne zeus ket bet klevet morse : trei a ra e benn hag e wel en e gichen eun eal ker gwenn hag an erc'h. « Dond a ran, emez-han, a-beurz ar Mabik-Jezus, da rei buez adarre d'ho merc'h vihan. » An tad koz a zav en e zao ; ne oar petra da ober, na petra da lavaret gand ar joa o deuz gret d'ean komzou an Eal... Dont a ra ennan e-unan... sonjal a ra e peleac'h ma... varc'hoaz, emez-han e vezimp barnet hon daou, ha barnet d'ar maro... n'euz ken da c'hortoz.

— Nan ! Nan, Ealik Doue ; mil bennoz d'eoc'h... Yvonnaik zo kousket, lezit hi kousket.

An Eal a zistro da gaout ar Mabik-Jezus, en eul lezel etre divrec'h he zad koz, korf maro Yvonnaik.

Antronoz pa deuchot da glask ar brizounerien da vond dirag ar barnet, kaer a oa sellet. Treveur hag Yvonne a Gerenor ne respountent ket. Sellet e oa piz dre ar prizoun... hag e kavhot daou gorf maro, an eil etre divrec'h egile. Ar vrec'h vihan e doa great d'hi zad koz mont ganthi d'ar Baradoz da ober gouel Nedelek.

Alo, bugale, eme Visant, o steki e gorn butun var ivin he viz meud hag o sec'ha e zaoulagad gant mench e chupen, ne reketan na d'eoc'h na da zen ebet gwelet eun amzer evel hounnez ; ha gouskoude var e glevan, an tam Republik-ma n'euz ket nemeur a c'houez vad ganthi. Kê diwar va hent, Jopik ; me blij d'in mond abret d'an Iliz da noz Nedelek. Kenavo a-benn bla, bugale, mar lez Doue ac'hanomp var hor iec'het... Kenavo, Visant, eme ni, ha da vñ eur gountaden all adarre...

— Ia, ia, nemet ar Mabik-Jezus a deufe d'am c'here'hat. » N'hor beuz klevet koncheñ ebet ken gant Visant koz. Da zeiz Nedelek, deuz ar mintin pa oa digoret Iliz Keraez, o akavet Visant var he zaoulin, kroaziet e zaouarn, harpet e benn deuz ar balustrer dirag ar ginivelez... ha sountet e ezili.

Eat d'e dro d'ar Baradoz da beurachui gouel Nedelek.

Keraez.

BREIZ.

II. -- AR SKOD NEDELEK

Da Gonstant Nerman.

Ar mintin-ze, pa zihunaz, Jobik a griaz, lawen : « Er c'h-mam ; gwen e mez ! Me garfe zével, rak sur awalc'h ne san tan mui drouk ebet... » Siouaz ! staget mad oa en e wele. Laret na ar medisin d'e vam : « Jobik zo gwall dapet, mez na gollet ket fianz. Gweled ve tud pottriner o para. » Abaoue diou zun-zo, ne zav deuz e wele nemed eur pennadik d'an abardaë. Hir a gave an amzer, rag e vam a renke mont aliez da c'honit he devez. Tad Jobik a oa maro, en eul lezel evit holl madou al lochik dister, var ribl an hent a ia d'ar voure'h. « Oh ! nan, eme e vam da Jobik, chomet en ho kwele ; ien skorn ema 'mez. Arc'hoaz 'ma gouel ar Mabik Jezus. Lavaret mad ho pedennou ken e vin deut endro. Hirio ez an da di ar maer. Setu aman ho lein. Me zeuio d'ober ho mern. »

E vam et kuit, sonjou don a zeuaz en penn Jobik Goud a rit e ziskenn ar Mabik Jezus en tier zo bugale fur, evit digas d'ezo leun a draou vreo. Ar sonj-ze, ervad, a horelle spered Jobik. Nec'het braz e oa, rag biskoaz netra na bet gant ar Mabik Jezus. Potredigou ar voure'h nize hepred eleiz daouarn da ziskont an eil d'egile. Mab ar maer, dreist-holl, nize ar muian hag ar bravan. Koulskoude oa anat mad vit eur pez difouter. Da vragal gant e vontr aour oa dibab, mez poz katekiz ne ouie. Jobik a reaz eur sell ouihan he-un.

Direbech ha gwenn giz an erc'h oa e goustianz. N'euz ket da laret, devot braz oa, hag aketuz da ziskont e gatekiz. An Aotrou Person he-unan, en doa amzavet ar vech diveza e zeuaz d'hen gweled. Jobik na gret van da gousket, mez klevet mad ha sur na aneon o laret d'e vam : Jobik e ar furan d'euz potred ar c'hatekiz. »

Perag neuze ar Mabik Jezus hen ankouee ? Na gave abek bet d'an dra-ze. Erlin o tont ar greden-man d'an : ar Mabik Jezus zo anouedik ha ne ia met lec'h zo tan. En ti ar maer ve alumet, da noz Nedelek, eur mell skod a bad beteg ar mintin. Ar Mabik Jezus, hep mar, a za da domma eno ha setu perag, a zonje Jobik, a ra kement a brezanchou da vab ar maer. Mez allaz ! E ti Jobik ne oa met eun neubeudik fagod. Petra ober ? Pell braz a chomaz da huvreal en dra-ze. Daoust ha d'anerc'h, skod Nedelek renke kaout. E vignon Loëiz ar boutaouer zur mad a roi unan d'an, mez heman zo e chom eur c'hant paz bennag deuz eno. Difennet oa dioutan ive mont er meaz ; n'euz forz, na bec'he ket pegwir oa evit ar Mabik Jezus.....

Varlerc'h e vern, benn oa deut e vam en dro deuz ti ar

maer, Jobik a zaillaz er meaz d'euz e wele. Lakat reaz e vonet var e ziskouarn ha hen kuit. An avel a c'houeze rust varnan, mez arok ken a zigouezaz. « Chennik ! te aman, eme ar boutaouer ; paret out. » — « Ia, tad paëron. Roi refet d'in eur skoden Nedelek. » — « A galon vad, ma mabik. » — « Ma ! Setu aman pez faut, en eur droi e zellou var eur pengozik fao. Mont a ran dont, rak gortoz zo d'outhon. Bennoz, tad paëron. » Ar skod oa pounerik vit diskoaz Jobik. E bep mare a chome en e zâ, dialan. An erc'h a stage d'euz e votou hag aliez e gouez war e vrec'h. Krena rê gand an anoued hag ar c'hwezzen zivere deuz e dâl. Benn arruaz er ger oa gozik mantret. Goude beza laket e bengozik fao var an oaled, e bignas en dro en e wele. An derzien vraz a grogaz ennan, krena rê vel eun delien. E vam en eur zistroi deuz he devez her c'havaz en hanter foll. Kaer na galvout n'an : « Jobik ma mabik, petra peuz ? » Ne rê met laret : « Jezus, te zo anouedik ; tosta d'an tan. Oh ! tan brao Nedelek. » Kalon ar paour kez mam a heuge gand an anken. En em lakat reaz da bedi, ebarz an toull-gor, evit e mab Jobik.

Mez setu deut an noz du-dall. Ne weler steren bet o splanna en oabl. An avel a iud e kichen dor ar lochik. Terzien Jobik zo torret erfin ha breman a gousk c'houek. E vam n'euz alumet ar pengozik fao hep gout deuz pelec'h e teue. Er voure'h, ar c'hleier a zon lirin d'an oferen hanter-noz. Eun neubeud potredigou zo bôdet e-tal an Iliz. Konta an eil d'egile e rant pe seurt festin vraz zo o c'hortoz anê varlerc'h an oferen. Mab ar maer a lip e deot dija... Laret a ra ive d'ar re all e ma zonz kaout arc'hoaz vintin eun hent-houarn bihan digant ar Mabik Jezus. E dad hen euz laret d'an hag ar maered a oar an holl draou. Arog mont en iliz e rant mad ar bromes da veza fur gand aoun a fachfe ar Mabik Jezus... Pad an oferen, en em zalc'hant reiz dirag ar c'havel. Koulskoude mab ar maer a ouel gant c'hoant da laret pegis oa e vam a na gwisket ar vrec'hoden gaer oa tal ar Mabik Jezus. Mez petra a dremenn breman ebarz lochik Jobik ? E vam zo ato e kichen an tan o pedi. Hen zo kousket. Mez en eun tol krenn, Jobik a lammaz en e zâ, en eur grial, e ziouvrec'h digor : « Oh ! Zell ta. Deut e ar Mabik Jezus da domma aman. Ma vont kuit en dro. Oh ! Kaset anon ganoc'h... » Selhouet oa ; benn a gouez en dro var e wele, ene gwenn Jobik a oa et pell. Ar Mabik Jezus hen doa kaset aneon gantan d'e varadoz evuruz. Ha breman e moc'h e'ouez an eled, Jobik karet. Ho pezit zonz deuz o mignon bihanik.

Roudouallek.

LOËIZ AR BAS, kloarek.

Nedelek al Laboused

D'an mignon Per Guivarc'h.

Jezus a ioa ganet e bro ar Judevien
E kreiz eun noz tenval, en eur c'hraou frank ha ien,
Hostisien Bethleem da Joseph da Vari,
Abek d'o faourentez na fellaz digeri.
Gwelomp, ni, kristenien, na pebeuz dienez !
Pegement e koustas da galon ar Verc'hez !
N'oa eno na kavel, tan, na dillad ebet
Evid digemeret Jezus o tond er bed !...
Truez oc'h an dud paour, oc'h ar re zo hep ti ;
Selaouit o c'hlemmou pa zeuont d'o pedi !
Hastit o digemer gant karantez ha feiz ;
Jezus eo a c'houlen diganeoc'h lojeiz.
Setu dor an nenvou o tigeri a grenn,
Ha bandennou elez o tinjal laouen,
N eur gana meuleudi da Zoue en nenvou
Ha peoc'h var an douar d'an dud eun o ioulou !
En dra 'z a pastored d'ar c'hraouik burzudus,
Henchet gant komz an Eal er goabren lugernus,
An evned oa bodet en eul leac'h goaskedet,
Hag a zalc'he kuzuill gant ar vran zu pedet,
— « Breudeur ha c'hoarezed, anaout rit an darvoud
A zo tost da Vethleem o paouez c'hoarvezout :
Hor C'hrouer azeulet en eur c'hraou paour meurbed
Euz ar Verc'hez dinam a zo nevez ganet...
Bet oun eun tachad zo, ahont oc'h ober tro,
Hag em beuz e velet var eur vojad kolo ;
Paour homp oll, mignouned, Jezus a zo paouroc'h,
N'euz ket var an douar tud kez reuzeudikoc'h !...
Pastored kalonek, kaset gant an elez
O deuz roet e kinnig n'ouzon ped darvadez...
Ha plijout a rafe d'eoc'h-hu oll kas ive
Pep hini e draik da vab karet Doue ?...
— « Ia ! ia ! a galon vad ! » emezo a gevred.
— « Me gaso, me ar vran, ar pemp vi zo miret
N'ouzon dare penaoz hep breina evel kent ;
M'o c'haso da boaza da Rouanez ar Sent... »

— « Me a roio keuneud, eme ivez ar bik,
 Evit tomma Jezus epad eur pennadik ;
 Pa zonzan mad em heuz eur bern mad a goad seac'h,
 Chomet dilerc'h va c'hoar abaoue 'n devez deac'h. »
 — « Me, eme ar gegin, me a gaso piz glaz
 Dastummet em c'hrignol, ha miret fresk beo c'hoaz :
 Diou pe deir fiezen oa ganin espernet,
 A galon vad bremaik da Jezus vint roet !... »
 — « N'en deuz nemed kolo evit gwele, va c'hoar ?
 Mad, me gaso d'he vamm danvez eur pluck klouar ! »
 A lare var eun dro milfid ha laouenan,
 Hag o c'hoar melenek, me lavar ar golvan.
 — « Na chemin ket warlec'h, eme ar pennglaouik,
 Me am beuz dastummet maread gloan oanik ;
 A galon vad m'her roi da ober eur c'holc'hed
 Da Jezus 'vit dougen e vemprou benniget. »
 — « Diou verc'h iaouank am beuz, a lavar ar goulmik,
 M'o c'haso da Joseph, m'o roio e kinnig
 Pa ielo ar Verc'hez evit goalc'hi he fenu,
 Ha kinnig he Mabik dre zorn ar veleien.
 An eostik, ar voualc'h, da heul an alc'houeder,
 A dosta o fichal o fennigou seder :
 « O vont da graou Jezus ni a gano eur zon
 En enor d'hor Mestr ker ! D'an eostik rei an ton !... »

— « Deomp eta, 'me ar vran, da velet hor C'hrouer,
 Da gas hor c'hinnigou en e graouik dister !... »
 Ma oe klevet neuze trouz an diouaskellou,
 Pep-unan euz e du a ia dre ar mezou.
 Eur pennadik goude ar vanden askellek
 A ia gant o zammou en tiad ezommek,
 Ouz o gweled Jezus gourvezet, a vouse'hoarz,
 Var e zremmik skedus al levenez a darz.
 Ar c'hanerien laouen a voulc'haz o c'hantik,
 Endra ma tizamme ar breudeur o beac'hik.
 An daou bried santel a dride o c'halon
 O welet en evned karantez ken gwirion.
 Pa oe divez d'ar c'han, hor Salver benniget
 A zavaz e zornik var bennou an evned :
 Ar bruched ruz zoken, pebez hardiziegez !
 A iez tre e zaouarn poulzet gant an elez.
 P'en devoe ar Bugel roet d'ezo e vennoz
 Al laboused a iez gant herr daoust ma oa noz
 Laouen braz hag eürus, kerkent da lavaret
 D'o breudeur morgousket ar pez oa tremenet.

KLAODA (" Barz Plougastell ")

Lanndi, 24 a viz du 1905.

KANTIK D'AR MABIG JEZUS

Tox : *Bale Arzur* (Barzaz Breiz), ha
Vierge Marie, j'aime ton nom.

Ni hoc'h ador, Mabig Jezus,
 Mabig dous ha madeleuz,
 Doue meurbed karantezus.

Mabig Jezus, e kreiz an noz,
 C'hui a zilez ar Baradoz
 Evit dont ganeomp fennoz.

Mabig Jezus, Doue Bugel,
 Ra vezo klouar an avel,
 En noz-ma, en dro d'ho kavel.

Mabig Jezus, dre an Envou,
 Elez a gan d'eoc'h kantikou.
 Perag klevan-me ho klemmou ?

Mabig Jezus, me oar ervad
 Perag e ouel ho taoulagad.
 Hor pec'hed ra d'eoc'h kalounad.

Mabig Jezus, hed va buez
 Me a veulo ho madelez.
 Ra vezin en ho karantez.

BARA AN ELEZ

Setu deuet euz an Envou
 Guir bara an Elez.
 Da Jezus hor c'halonou
 Hag hor c'harantez.

O ! Tad madeleuz,
 Pastor benniget,
 Mignon karantezus,
 Ra viot karet.

Dindan spesou dister,
 Guir den, guir Doue,
 Ho kuelan, va Zalver,
 Va Mestr, va Roue.

Em c'halon reuzeudig
 Lakit a nevez
 Da zevel birvidig
 Tan ho karantez.

Euz va holl bec'hejou
 Goalc'hit va ene.
 Va glac'har, va daelou,
 A c'houlouen true

Peur, o pried fidel,
 Hellin en em vaga
 Demeuz ho Taol Santel !
 Peur, na peur eta !

O ! brasa levenez,
 O ! tra dudius.
 Eüruz vel an Elez
 Emon gant Jezus !

MESAER ! MESAER !

Diskan

Mesaer, mesaer, livirit, ne welit-hu ket ? (bis)
 En eur welet eur c'hraouik dister (bis)
 Va c'halon baour a lam em c'hreis. (bis)
 Ia, setu aze ar c'hraou dister
 A guz eun Doue en e greiz.

I

Sonj ho peuz deuz komzou an Elez ?
 Nag hi oa kaër ha dudius !
 Int a gane e bar an Envou : « Gloar,
 Gloar da Zoue mestr holl-c'hallouduz. »

Diskan

Mesaer, mesaer, ia, e Bethleem omp digoue-
 [zet. (bis)]

Deomp buhan da welet ar Zalver (bis)
 A ro Doue d'e bobl direiz.
 Ia, setu aze ar c'hraou dister
 A guz eun Doue en e greiz.

II

StrafUILLET holl oent var ar menez
 Pa weliz o dremmou skeduz.
 Int a gane : « Ar peoc'h vo var an douar
 D'an holl dud eün a galon ha sentuz. (bis) »

AN TEIR C'HAD

ARVEST II

Kevren V

En hostaleri ar Marc'h Gwen

AR MEVEL

Setu aze, Aotrou.

IANN

Mad eo, va fotr, divorfil out. Selaou 'ta, ne helpez ket rei eur plad all d'in pe eur skudel bennag evid la-kaat ar friko-man a zebrin a-hed an hent, rag mall braz eo d'in mond kuit.

AR MEVEL

Eo, Aotrou dioustu. (Mond a ra da gerc'het eur skudel e pehini e laka ar friko).

IANN

Mad dreist... An tam bara-aman a gasan ive gann, ha beb an amzer e c'hellin diskolpa eur c'hinaouad hag e kavin berroc'h an amzer. Dal paotr, setu ar bae evid da labour ha gwerz-butun ouspenn. (Iann a bae ar mevel a ia kuit en eur gana).

Kea d'an drotik

Paour keaz Iannik

Ha kan bepred, var varc'h ha var droad

Kea d'an drotik

Paour keaz Iannik etc.

Kevren VI

AR MEVEL (o tenna an traou divar an daol)

Setu aze eun inkin avad!... Daoust hag ar c'homperze n'en defe ket great eur mestr-taol bennag?... Gwella zo, en deuz paët mad ac'hanoun, gwerz ar butun a m'euz bet zoken. Anez em bije diskuilled dioustu d'an archerien. N'euz forz, eur gir a lavarinn d'an Aotrou Maër, rag an Aristol-ze a zo c'houez fall gantan.

ARVEST III

E ti an Aotrou Bidoc'h

AN AOTROU BIDOC'H (O vale en e gampr)

(Iann a sko var an nor)

BIDOC'H

Piou zo?... Deuit en ti.

IANN

Devez mad d'eoc'h, aotrou Bidoc'h! Deuet oun da zigas d'eoc'h a beurz an Aotrou Pendolok va mestr, peadra da ober eun tamm fest evid morlarjez. (Iann a vel al lizer hag a laka e baner var an douar).

BIDOC'H

Ha! Iann te a zo eur paotr kalonek, ha da vestr a zo ar gwella euz an holl vignoned. (Al lizer a lenn huel)

Va mignon ker, eur blijadur vraz eo evidon kinnig teir c'had d'id. An dra-ze a ziskuezo pegen evuruz eo bet va abaden chaseal. Kredi a rafen ober gaou ouz hor mignoniach koz o chom hep kas d'id peadra da ober evid morlarjez eun tamm lip-he-bao... Lavar da Gatell lakaad he holl gwiziegez da ober mad ar geusturen.

Da vignon koz : Pendolok.

Gwelomp 'ta ar gedon kaër-ze.

IANN (oc'h asten e baner)

Dalit Aotrou, setu hi aman.

BIDOC'H (o tigeri ar baner ne gav nemed diou c'had)

Mez va faotr ne welan nemed diou, ha goulskoude, al lizer a gomz d'in a deir c'had.

IANN

Ia aotrou, teir c'had,

BIDOC'H

Mez, n'euz nemed diou c'had en da baner.

IANN

Ia Aotrou, diou c'had.

BIDOC'H

Ac'hanta, al lizer am m'euz lennet bremaik dirakout a gomz a deir c'had.

IANN

Ia, Aotrou, teir c'had.

BIDOC'H

Eur vech c'hoaz e-lec'h teir, ne welan nemed diou.

IANN

Ia Aotrou diou c'had.

BIDOC'H

Azen diot ma z' out, eleé'h teir nec'h euz nemed diou.

IANN

Ia Aotrou, diou c'had.

BIDOC'H

Anzao freaz d'in ez poa teir c'had da zigas a beurz va mignoun.

IANN

Ia Aotrou, teir c'had.

BIDOC'H

Teir e lavarez : e-pelec'h ema an derved rag n'ec'h euz aze nemed diou hepken.

IANN

Ia Aotrou, diou c'had.

BIDOC'H

Mez, zac'h-an-dien! ne ouzout na sou na dic'ha! ne ket diou eo, pa lavaran teir.

IANN

Ia Aotrou, teir c'had.

BIDOC'H (o skriva)

Ro peoc'h d'in, ginou tarte! rag sotoc'h out eget ar boutou a zo en da dreid. Dal, ro al lizer-man d'am mignon Pendolok. Selaou c'hoaz ac'hanoun. Mar kavez pe mar klevez e ve en eun tu bennag, spered ha skiant da verza e rafez mad prena da lod... ezom ec'h euz.

IANN

Kenavo Aotrou, ha iec'hed mad d'eoc'h (e za kuit).

BIDOC'H

Pebez ginaouek! pebez diot! ne ouzan ket penaoz va mignon Pendolok a c'hell derc'hel en he di eur banez evel hennez.

ARVEST IV

Iann distro euz e veaj

PENDOLOK ha IANN

PENDOLOK

Iann, eun tammik out divezad.

IANN (o sec'ha e dal)

Kredi ac'hanoun Aotrou, redet am 'euz ken a c'houezan.

PENDOLOK

Heb ehana tamm ebet.

IANN

Ha, Aotrou, ken nebeud ha ma ne dal ket ar boan komz a gement-se!

PENDOLOK

Ha petra en deuz lavaret d'id an Aotrou Bidoc'h.

IANN

Al lizer-man en deuz roet d'in evidoc'h.

PENDOLOK

Petra en deuz lavaret divar benn al lapined. Laouen eo bet ouzid?

IANN

Oh! ia Aotrou, biskoaz n'em euz gweled-den laouennoc'h. Lavaret hag aslavaret en deuz meur a wech penaoz ez oac'h ar gwella euz an holl vignoned... ha me ive emezan a ioa eur bon garson.

PENDOLOK (lenn al lizer a vouez uhel).

Va mignon ker. Eur merk nevez a garantez a ziskuezez en eur zigas d'in eul loden euz ar pez ec'h euz paket o chaseal. Lavaret a refet zoken penoz out mou-

mounik Sant-Hubert, rag eur maout out evid dineiza ar gedon. Eun neubeud oun souezet evelato ouz da glevet o komz ouz a deir c'had, ha Iann n'en doa nemed diou en e baner. Martreze n'az poa ket lazet mad unan euz an teir c'had hag hennez a gredan a zo eat e breskin euz a baner Iann, hag a zo o c'hoari koukou en eun tu bennag... N'oun ket evit-se neubeutoc'h anaoudek d'id ha da d.ugarekaat a ran a greiz kalon, rag gant an diou c'had, Katell a raio d'eomp eur geusteuren, eur friko euz pehini ne vanko nemed-oud.

Da vignoun anaoudek, Bidoc'h.

Iann ! Iann ? Kleved mad ec'h euz ar pez a m'euz lennet var al lizer-man ? N'em boa me ked lakeat er mintin-man teir c'had er baner ?

IANN

Ia, Aotrou, teir c'had.

PENDOLOK

Ha va mignon Bidoc'h a lavar n'en deuz bet nemed diou.

IANN

Ia, Aotrou, diou c'had.

PENDOLOK

Anzao a rez ive n'ec'h euz roed nemed diou

IANN

Ia, Aotrou, diou c'had.

PENDOLOK

Brema eo sklear hag anad evid ann holl penaoz e teuz roet teir c'had da...

IANN

Ia Aotrou, teir c'had.

PENDOLOK

Ro peoc'h d'in, glaourennek, ha penaoz Bidoc'h n'en deuz bet digan-ez nemad diou c'had.

IANN

Ia Aotrou, diou c'had !

PENDOLOK

Peoc'h e roi, ginou tartzet ?... ha selaou mad... euz a zaou lapin da dri...

IANN

Ia Aotrou, teir c'had.

PENDOLOK

Eur veach c'hoaz peoc'h a roi, marlounk ! Te a rafe d'in koll va skiant. Eul lapin a vank ne dal ked a boan d'id klask digaresiou. Petra ec'h euz-te great gant-han ? Klaoustre ec'h euz bet ann tanva anezhan ?

IANN

Ah ! Ah ! Ah ! Aotrou, c'hui n'oc'h ket eun den ken diod hag ho mignon Bidoc'h, c'houi zo eun diviner !!!!

KLAODA

Efflam Kerzenan ha Mac'haridik

(DANEVELL NEVEZ)

Gant Efflam An HENORET (Plestin-an-Traez).

Kendalc'h (7)

— VII —

Efflam Kerzenan, a c'houlenne diganthan, he unan ha hen oa gwir ar pez a nevoa laret d'ean, eun neubeud devejo arog, an aotrou Lafond... Martreze ive, a nevoa ho meulet kalz re... Evel meudeusin, Efflam a nevoa gwelet kalz a draou, ha kement ze en lake da gaout eun tam disfianz... gand ar zonzou ze en e spered, a c'he bepred, gand he fuzul, tresek melin Sant Nikolaz. An amzer a zalc'he bepred kaer, ha brao meurbed.

Daoust pegoulz, a zonje Efflam, e teuio adarre d'ober glao ?... Ari oat en komansamant miz meurz, ar glao a ra neuze ha ve aezet da gonta : gant eun amzer evelse,

n'a woa ked red d'ean bea en zonz da gaout glao, evit mont adarre da ziskloia d'ar Gaer-Veur.

Eur mignon en doa da dad Mac'haridik : pa varvaz ar c'hamarad ze, a nevoa evel dhan, renked kwitat Pariz, evit dont da chom do Vreiz-Izel, maro ar c'hamarad ze, a reaz kalz a zisplijadur da dad Mac'haridik, rag eun tam mad a oa iouankoc'h evithan ; Doue na lavar ket, pe ar re iaouank pe ar re goz a varv da genta, ober a ra ar pez a blij ganthan.

Setu eta deut dorn ien an ankou da skei he gamarad ar brasa, an hini a nevoa promettet mad d'ean, kemmer ar pez a gare ar muia, he oll gonsolasion er bed man. Petra a deuje da veza Mac'haridik pa vije maro ?

An dra ze ha kalz a draou all c'hoaz, a lakaz anean da gweza klanv.

Mac'haridik a reaz ive kalz a boan dei kement-ze, zoufr a reaz koulz koude heb laret man, ar boan spered a zigasse d'eï an Aotrou Doue... Eun devez, a c'heaz da gaout an Aotrou Person. An Aotrou Lafond a c'heaz da gaout he zad, meur a veaj a nevoa he gonsolet, goud a re an hent a c'he var eon d'ar galon, mez Erwoan de Montre, hennez oa hanv tad Mac'haridik, na c'halle ken had zével, re diskaret oa gand an dristidigez, ha gand he boan spered e teuz d'ean poan benn, kastia a re bemde, na c'helle ken chom var he dreid ; na c'halle ken na kousket na dibri, dont a reaz da veza livet fall ; na oa varn'han nemed liou ar maro pa chomaz en he wele.

— Da bellec'h a c'het hui evelse, Mari-Louiz, a laraz an Itron Kerzenan, o welet eur labourerez o tont en he zi ? Na man ked an Aotrou Efflam er gaer ! Nan, a laraz adarre an Itron Kerzenan, aet eo da di an Aotrou Keriell.

Evel ma oa laret d'eï, Mari-Louiz melin Zant Nikolaz, a gavaz Efflam Kerzenan en ti an Aotrou Keriell.

Efflam azeet en tal gwele an Itron, klanv gand n'on ket petra, a c'hessaë laket anheï da gredi penoz en desped d'he foan benn, na varvje ket c'hoaz.

Efflam, stad enhan, a lezaz he glanvourez, evit mont he unan gand Mari-Louiz melin Zant Nikolaz, tresek ar Gaer Veur.

Dre ma tostaë da di ar c'hlanvour, Efflam a zante he galon o lampad muioc'h mui ; ober a reaz eur zell deuz an den klanv, lakat a reaz he zorn var he vrec'h... netra, e wad a rede evel goad eun den iac'h...

Erwan na oa ket klanv... ha koulz koude a nevoa eur c'hlenved, unan ha na halle meudesin ebed gwellat anean, ar boan spered ; ar boan spered ze en eur ampech an den da zibri, pe da eva, a zeu da vea eur c'hlenved a c'hell memeuz hon lakat en danjer da goll hon buez.

Efflam na roaz ordrenanz ebed, evit eur c'hlenved evel hennez, goud awallac'h a re penoz ar remejou na rejent netra, nemed lakad anean, marteze, da veza klanvoc'h.

Mar galje, hebken, rei d'ean an esperanz da zistrei, ze a vije awalc'h evid digas d'ean ar iec'hed.

Er c'heid ha ma vije he zad en e wele, Mac'haridik a chome er maez noz-de, evit veilli anean, hag en pad ma vije he zad o klemm var e boan, Mac'haridik na daole ket he daoulagad divarnan ; diou zun a oa na oa ket bet koulz laret, kazi en gwele abed ; Mari-Louize Melin zant Nikolaz a lare d'eï : « Mac'haridik ma na gare diwal e koueï klanv, neuze da vihanan e varvo da dad gant an dispiljadur » neuze Mac'haridik. gant an aoun da gaout he zad maro, a c'he pennadou bihan deuz tal e wele. Eun devez, ar c'hlanvour a chommaz kousket, Mac'haridik a drugarekaë Doue, var bennou he daoulin da veza he selaouet ; mez ar c'hlenved evitan da veza roet d'he zad eun tamm peuc'h, a hadkrogaz gwasoc'h eget biskoaz.

Mac'haridik a zilemmaz deuz he c'herc'hen ar vedalen ar'chant, roet d'eï gant he mam araog ma varvaz, ha gant eur spillen her stagaz deuz ridoch gwele he zad.

Erwan De Montre, adalek moa bihan, a nevoa disket gouzanv heb n'em glem, ar pez a errue gantan ; e vam, eur vam gristen, ma zo bet unan bennag, e devoa disket d'ezan, penoz evid gounid ar baradoz, e tlee ober evel ma nevoa gret aroghan Jezuz-Krist, pehini a c'ha-

naz en eur c'hraouik bihan, a varvaz var ar groaz, heb digori e c'heno da n'em glemm.

Ar sonj deuz Mac'haridik, dreist-holl, a lake anean da ouela. Petra, emezan, a deuo Mac'haridik da veza, eur wech a vin-me laket en bered vihan Tremel? Goud a re penoz e verc'h oa bet adalek he bugaleaj nemed eur botrez fur... heb tad... heb den ebet d'her zouten... Petra e deufe da vea?

Efflam Kerzenan a wele kaji ar pezh a dremene en kalon Erwan Montre pa vije Mac'haridik dirakan, hag a re e bosupl evit er pellaat muia ma c'halle, deuz gwele e glanvour.

Neuze Mac'haridik e n'em dole var bennou he daoulin, dirag he c'hroaz: « Ho ma Doue, bezet truez ouzin na lezet ket ac'hanon ma unan var an douar; dilammit ho peuz diganin ma mam, lezet ganin da vihana ma zad, ma holl zouten, ma holl esperanz! »

Mari-Louiz, melin Sant-Nikolaz, an Aotrou Lafond, ha kalz a dud all deuz Tremel a deue da weled, ha da rei eun tamm konsolasion d'ar c'hlanvour... Kement-se a roe da Erwan Montre, eun tamm esper.

Mac'haridik he-unan a wele awalc'h he zad o vond vond war vellaat bemde, hag eun devez, pa oa Efflam e kichen e wele, e c'houlennaz digantan:

— Brema evelkent, e c'ha ma zad kalz gwelloc'h?

— Ia, eme Efflam, e glenved a zo brema tremenet, ha ma talc'h an amzer vad, ebarz eur pennad aman e c'hello mond da gemer an er vad, d'ober baleadennou blhan, var bord ar rivier, ha me a zonz penoz ebarz enn neubeud amzer aman, ho tad a vo fac'h mad.

— Trugare d'ec'h, eme Mac'haridik o sevel he daoulagad tresek Efflam Kerzenan.

En ober eun neubeud devezou, ar c'hlanvour, evel ma nevoa laret Efflam Kerzenan, a n'em gavaz nerz awalc'h d'ean evid sevel deuz e wele, azeet var eur gador, en toull e dor, tommet gant an heol, e tremene eul loden vraz deuz an de.

An amzer klouar ha brao, eur bannac'h avel douz, a hije hebken ar brankou; avalou ar gwe, an deillou a voute, hag ar gwenan a zeu er meaz deuz ho zi da frinkal, kement-se a lake Erwan da gaout ber an amzer; Santout a re an er vad diwar rivier melin Sant Nikolaz, o tond da adbeva anean.

Mac'haridik o weled he zad aru pare, a zistagaz ar vedalen he devoa staget deuz ar ridojou, a uz da benn he zad, an dour en he daoulagad mont a reaz tresek ennan: « Setu aze, ma zad, ar vedalen he deuz o tiwallet deuz ar maro, me a ouie awalc'h penoz ar werc'hez na zilez ket he bugale. »

Erwan De Montre, kerkent a ma welaz he nerz o tont d'ean a c'heaz adarre da labourat.

— Da betra labourat kement-se, a lare d'ean Mac'haridik, koueza a rafet adarre en o toull koz... Prometet d'in, a lesfet al labour a gostez divar hirie... Mar gouvefec'h pegement a boan a ra d'in gweled ac'hanoc'h, en risk da goueza klanv a nevez! Ho ma zad, na garet ket ac'hanoun eta?

— Nan, na garan ket ac'hanout, eme Erwan!

Er c'heit ma oa dalc'het tad Mac'haridik klanv var e gwele, na dremene ket eun devez heb ma teue unan d'en gweled, amezeien, tud iaouank, tud koz, tud a beb stad, a beb oad, a zirede da zigas d'ezan, darn boutailou gwin, darn all bombonigou ha beb sort traou.

Eun devez deuz an noz, Efflam Kerzenan hag Erwan de Montre a gonte kojou o daou, pa gleochont unan bennag o skei var an nor; pa zigoraz Mac'haridik an nor, e kavaz Yvonaik, n'eo ket da glask e teue, nan, en he davanjer e touge eur sort bennag.

— Dalit emei. demezel iaouank, setu aze diou vou-tailad gwin koz, kemeret-hi, en hano ma goaz pehini o digasaz d'in eun toullad devezou araog ma varvaz, Doue d'en pardono.

— Miret unan anhê, a laraz Mac'haridik, da Yvonaik en eur gemer eben gant aoun d'ober displijadur d'ei, beteg goud a zigouefe d'ec'h koueza klanv!

— Me garje, eme Yvonaik bea pinvidik evit gallout zikour ac'hanoc'h eun tamm bennag, kemeret houman-all eta, pe na vin ket kontant.

Mac'haridik hi gemeraz en eur laret da Yvonaik dont en ti da eva eur chopinad jistr pe eur banne kafe.

Mez Yvonaik, pa glevaz mouez Efflam Kerzenan, a gemeraz he baz, evit mont adarre tresek bourk Tremel; mond a re en eur gammigellad biou ar c'haran a n'em gave en Kerzenan...

Efflam Kerzenan hag Erwan de Montre n'o devoa ket rannet eur gir, er c'heit ma oa bet Mac'haridik hag Yvonaik o kozeal; klevet mad ho devoa kement komz ho devoalaret. Komzou Mac'haridik a ziskenne en he galon, ha c'houec'h lâ oa, na nevoa santed sort ebed oc'h ober kement a vad d'ean; an daërou a rede var he zious jod.. Efflam a laraz neuze kenavo d'ar reman, evit mont da weled eun den klanv...

Na renkaz ket bale gwell vuan evit tapout Yvonaik: Yvonaik, azeet, he daoulagad troet tresek Sant-Nikolaz, a c'haste laret he chapeled var eur rozera, na gwitaë ket anei jamez.

— Yvonaik, a laraz Efflam Kerzenan en eur ariout en e c'hichen, c'houi a gle bea skwiz...

— Ia, eme Yvonaik, aboue ma renkan bale gand eur vaz a ven gwall skwiz.

— Na gavfec'h ket ar pezh ho peuz ezom evit beva dre aman, kwit da n'em skwiza o vont d'ar parejou all...

— Geo, eme Yvonaik, na vefe ket just d'in chom bepred dre aman, da veva divar goust ar memez re...

— Pa c'het pell evelse, a dra zur an holl dud o deuz truez diouzoc'h... digemeret mad a vec'h dre holl? Piou eo an hini a gredfe refus ac'hanoc'h, pa c'houveo petra a zo bet aruet ganec'h?

— Oh, eme Yvonaik en eur blega he fenn, ze n'hallan ket laret d'ec'h, ni entreomp pevien, a gle goud rei peuc'h, na c'hallan laret kementse da zen ebed, ha d'an Aotrou Efflam Kerzenan, c'hoaz neubeutoc'h evit d'ar re all.

— Abalamour da betra, Yvonaik? An dra-ze, mar-teze a zispilje da unan benag, mar geo gwir ar pezh a meuz klevet.

— Petra o peuc'h klevet? laret an d'in, me ho ped...

— C'houi, a laraz adarre Yvonaik, a gle goud kementse, mar c'heo gwir a c'het da zemei d'an demezel Fernande Keriell.

— En kastell an Aotrou Keriell eo na vez ket roet d'ec'h neuze?

Yvonaik a roaz peuc'h, plega reaz he fenn heb lared man ebed; Efflam a intourdiaz anei kement ken ben ar fin, evit kaout peuc'h, Yvonaik a laraz:

— Na dremenont ket, hebken, hep rei an aluzen d'ar paour, hissa a reont ar chas var ar re a gred mond en o forz... Ha koulskoude, ar re na garont ket ar bevien, na veint ket karet, na gand Doue, na gand an dud! Ar vech kenta ma oan aët da c'houlou an aluzen da gastell an Aotrou Keriell, an Itron a laraz d'in, en eur gros-molat, penoz e oan re iaouank da vond da glask, penoz e oa memez eur vez d'in, d'am oad, mond da redek deuz tal an eil toul dor d'egile! C'houi, a laraz c'hoaz an Itron, mar karfac'h lakad ho korf da labourat, a zo kapabl awallac'h da c'honit ho puez! Pa vefet c'houi eno, na vo ket laret ar sort kojou ze d'ec'h, a dra zur?... N'eo ket evidon va unan a laran kement-se, rag me na meuz ket ezom deuz kalz a dra; ha mar karjen, a c'hon barek da veva evuruz gand an aluzennou a me deuz ti Mari Louiz Melin Sant-Nikolaz, ha ti Mac'haridik.

(Da heuil)

BREIZ!

D'am mignon Mazo

Falc'h an Ankou, va bugale,
A zo savet uz d'am diouskoaz
Hag am dibenno dizale,
Hag ho taelou a redo c'hoaz...
Ha c'hoant o peuz da gaout da viret
Ar zonz euz ho tad en ho kreiz?
Karit hor bro vel am euz gret,
Karit hor Breiz!

Labourit ha poagnit dalc'had,
Ar c'houezen o liva ho tal;
E parkou Breiz skuillit hoc'h had;
N'o pezo mui nemed gedal:
Fizians! hoc'h eost a zarevo!
Arabad dilezel hor Feiz,
Evel ho tad, harpit ho pro
Servijit Breiz!

Sikourit Breiz ho pro gwirion
Euz hoc'h holl galloud ha skoazel
Evel am euz gret gant kalon.
Hag enor d'id, Breiz, bro santel!
En distro deuz ho poan, potred
Hep goulenn netra diganti,
Gouzanvit peb tra, mar be red,
Holl eviti!

Da Vreiz oc'h dleourien, potred
Da gaout eun tremenet divlam,
Ho Feiz, ho kiziou, ho spered:
Breiz zo evitoc'h eur gwir vam.
Evit hi renta divarvel,
Deskit labourat ha pedi,
Ha deskit, mar bez red, mervel
Holl eviti!

IOUEN.

AN NEZEREZ

Na peuz ket gwelet Franseza
War dreujou he dor o neza?
He bleo melen evel al lin
O kuruni he zal lirzin?

He daoulagad don vel ar mor
Zo glaz vel oabl skedus Arvor,
He gouk gwen evel an eonen
A nij war griben ar wagen.

He dornik bihan ha mibin
A ra trei founnus an inkin,
A wi an neudennik velen
Moan ha gwenn evel eur seien.

En eur neza ar plac'hik glan
Gant eur vouezik dous a vouskan
Eur zon desket pa oa bugel
Gant he mam var bord he c'havel.

Al lapoused ouz he c'hlevet
A dao el liorz souezet
Hag ar beajour a lavar,
E vizach troet d'an douar:

« Kanet, plac'hik koant, o! kanet,
Ho mouez a zarda ma spered...
Ho son a lak sonjou tener
En kalon drist an tremener.

« Kanit, rag henvel oc'h kremen
Ouz eun devez kaer o tarzan,
Ouz eun devez amzer skedus
A zargan eun hanv dudius.

« Henvel oc'h ouz eur stereden
Pa ve c'hoaz en penn he rouden,
Ouz eur parkad ed bleuniet kaer
A gargo d'an eost ar zolier.

« Kanet eta, o nezerez!
Ar zon zo gret 'vit ho tiou ieuw...
Kanet, rak marteze warc'hoaz
A vo re zivezad, allaz! »

LAOUIK

Ar gwennili hag ar bugel

Kannad an nevez amzer, gwennili tremeniad,
Ehan da nijal, laosk da ziskuiz eur pennad
Da askel, duoc'h eget ar mouar var an drez,
Ha lavar d'in, gwennilik, deuz pe leac'h e teuez?
— Da c'houlou-deiz, skolaerik, d'ar poent m'oz gweledet
Enn da wella kousk-mintin, dreist Pariz 'meuz nijet.
— Braz kenan ez eo Pariz?

— Petra leverez-ta?

Evit gwir, diouz an neac'h, eo doareet da veza,
Dioc'h ar pez e meuz gwelet ebarz va beachou,
Unan deuz ar re vrasa e-touez an holl geariou.
Mez petra ez eo Pariz evidoun, e kichen
Brazder ar bed? A-boan 'vel eur boden-merrien.
Teir vunuten marteze 'meuz lakeat d'he zreuze,
Hag assur, a-nez out-te, ne zounjfen ken enni,
Euz ar mor doun 'meuz gwelet an tarziou eonennuz,
Var lein menezioù uhel an erc'h mezevelluz.
Setu aze traou c'heller lavaret braz meurbed,
Ha ne d'eo ket kear Pariz varzu p'hini a red,
Meuzon da spered iaouank hirio d'ober eun dro!
Selaou! Mesk an holl tiez a zo berniet eno,
Ne zeuz ket, va mignounik, nan unan, var va feiz,
E harz pehini 'garfen diazeza va neiz.

Pegen gwelloc'h eo ama, dindan an heol splan,
Mesk ar gwez, ar glazennou..... Anavezout a ran,
Var levann eul lenn sklear, 'harz an draonien kuzet,
Eun ti soul en pehini ez oun prest gortozet.
Divar an treujou 'zanter ar c'houez euz ar spern-gwenn
Hag euz ar bleuniou lireu savet en o c'hichen;
Klevet e vez ar gwenan laouen o safrouni;
Palafennou alaouret ara an dro d'ezhi....
Hag ar c'hreg pa va gwelo o tont, a-dreuz an ear,
A denn-askel d'he zoën a vouze'hoarzo seder.
Mall am euz da erruout. Kenavezo, keazik.
Bev e leac'h m'ho deuz bevet da holl dud. Reuzeudik
Ez eo peurvuia, siouaz! buez r re divar meaz
A ia da glask er c'hearieu plijadur pe danvez.
Didamant euz a Bariz, er Vro ma zout ganet,
Chom da vervel e-touez kerent ha mignouned.
Va c'hred, an traou burzuduz c'helfez gweled eno.
Ne dalont ket an ear iac'h a zeu deuz an Nenvo.

Keraez

Charlez AR BRAS.

JELVESTRIK

Ar Chouan Bihan

TRAJEDIEN EN PEVAR ARVEST

Gant an ARC'HANTEK

(Kendalc'h)

JELVESTRIK

Na meuz na kar na par, na den war ar bed-ma,
Ma hunan oun bremen e war ar bed garo.
Va mam a zo maro bremen zo pell a zo.
Ha ma zad Yann Kleglan....

IANN

Penoz! a posubl ve!

JELVESTRIK

Para ta?

IANN

Jezus! roet d'in nerz ma Doue!
Te vefe Jelvestrik, ma mab muia karet?

JELVESTRIK

C'houi ta ec'h eo ma zad? hasted da lavaret.

IANN

O ma mab kaez!

JELVESTRIK

Ma zad!

IANN

Trugarez d'ec'h Jezus!

Bennoz d'ec'h ma Doue deuz an devez eüruz
Peuc'h roet d'in hirie.

JELVESTRIK

Trugarez d'ec'h, Aotrou,
Da veza roet d'in aman, barz ar c'hoajou
An eurvad da gavout ma zad muia karet
Ebarz eun devez ken kaer evid ar Chouanted.
Ma zad, lavared d'in pelec'h man va breur Loeiz
'Vit ma pokin d'ean.

HERVE

Duze man barz ar c'hreiz.
Herve a c'halv Loeiz

Loeiz deuz aman buan, bea zo kelou mad.

LOEIZ

Para zo a neve, para zo 'ta ma zad ?

YANN KLEGAN

Sell, da vreur zo aze.

LOEIZ

O ! te eo Jelvestrik !

JELVESTRIK

Ia, me eo, ma breur kaez, me eo da vreur, Loeizik.

n'om boket a raint

IANN

Deut aman 'ta ho taou, deut etre ma divrec'h,
Ha laromp mil bennoz d'an Doue zo d'an nec'h,
Goulenomp digantan be atao unanet
Ken a welfomp Doue en palez an Drindet.

Kevren IX

GUILLOU, HERVE, AN ABAD, YANN KLEGAN
JELVESTRIK

Para vo gret, Herve, deuz ar Meliner Koz ?
Hon breudeur zo aman, enouet o c'hortoz
Lavaret d'emp 'ta Mestr.

HERVE

Red vo d'ean mervel !
Hervez al lezennou, lezennou ar brezel,
Neuz nemed ar maro evit an treitourien.

GUILLOU

Ia, ar maro, n'eo ket hini gwir kristenien,
Eo lod an trubarded ?

AR CHOUANTED

Ia, neuz 'med ar maro
Evit krimou ken braz ; c'hoaz n'eo ket re c'haro !

HERVE

Silaouet kristenien, digored ho skouarn
'Vit ma zisklerin d'ec'h troiou ar c'hoz louarn ;
Yann Goz ar Meliner, mignon d'ar zoudarded,
Neuz gwerzet he vredeur, neuz gwerzet Chouanted
'Vit eun neubeud arc'hant, a neuz gwerzet hon gwad,
Kavout a ra d'ec'h, Breiziz, eo dever eun den mad
Dont da werza e vro ?

AR CHOUANTED

Nan, nan ! Yann zo traitour !

HERVE

Graet a neuz c'hoaz ouspenn, ar Meliner bek flour,
Tennet a neuz war daou zen a oa o tont ama
Da zigas ar c'helou d'an dud euz ar vro-ma
A oa ar zoudardet o tont da ataki
Difennerien ar vro, lared d'in hoc'h ali

AR CHOUANTED

Gwerzet a neuz e vro, gwerzet neuz Breiz-Izel,
Yann Goz ar Meliner a renk dond da vervel !

HERVE

E varo a vo skouer 'vit an drubarded all
Da botred ar re C'hlaaz, da vignoned Bro-C'hall,
Marteze, pa velfont penoz vo gret da Yann
Teufont ket da werza ac'hanomp ken buan.

GUILLOU

Pe sort maro a vo 'vit Yann ar Meliner ?
Lared d'emp-ni breman, na vezit ket tener

HERVE

Penoz a vo lared ! Para lered Potred ?

AR CHOUANTED

Dek bouled n'he galon eo ar buana tra
Evit laza eun den.

HERVE

Hag ive ar berra.

Mad, Yann ar sorser koz vo fuzuliet prestik.
Lar d'ean dond aman, te, va mignon Laouik,
Vit glevo he setanz, he gondaonasion,
Kers, ha lavar d'ean na neuz ket a bardon
Evit an drubarded.

Kevren X

AR MEMEZ RE, HA YANN GOZ

Holl omp n'em unanet evit dont da varni
An torfejou peut graet, Yann, ebarz o kozni.
Dizenoret peut bet ho gwad hag ho pleo gwenn
En eur werza ho Pro hep remors, hep anken.
Pegement deuz hom zud deuz kollet ho bue
Dre ho trubarderez, ho kalon didrue ?
Pegement a dadou peuz kaset d'an douar
Pegement a vammou peut laket en glac'har ?
'Vit eun toullad arc'hant, evit tregont diner ;
Ia, gwell vraz eo ho krim, Yann Goz ar Meliner.
Tennet a peut bet c'hoaz, tennet peut oc'h unan
E war daou Vreizad mad. N'eo ket gwir Yann Klegan ?

YANN KLEGAN

Ia, tennet a neuz bed e war ma mab ha me
Pa oamp o tont aman, en tu-ma d'ar mene.

HERVE

Para peut da lared, Yann Goz, kaozeet ta !

YANN GOZ

Deuz an holl Vretoned ec'h oun zur ar falla.
Ia, gwerzet a meuz bet ma Bro ha ma Breudeur ;
Ma c'hrimou a zo braz vel ve ket gwell nemeur
E barz bro all'ebed. *(Da heuil)*

Votadek evid hennvel eun Arc'hdrouiz

Eun Arc'hdrouiz nevez a zo bet hanvet en Breiz-
Veur, evid kemer lec'h Houva Mon. E hano a zo
DYVED. Pehini a vezo doare-ober Gorsedd Barzed
Gorenez Breiz ??

Gwechall, ne oa ket a nec'hamant : ne oa nemed eur
Gorsedd, hini Breiz-Veur, deut d'eomp a-zalek penn
kenta an oajou keltiek, mez brema, eur bod anezan a
zo die'hwanet en hon Breiz ! Gorsedd Breiz-Izel a zo
bet aotreet hervez al lezennou hag ar reolennou, ar 26 a
viz Gwengolo 1900, dre eur paper-timpr skrivet gant
dorn Houva Mon, sinet gantan, adsinet gant Cadvan,
drouiz, siellet gant kachel ar Gorsedd Braz ; e savedi-
gez a zo bet embannet en Eisteddfod Merzzyr, dirag mil-
lierou tud, er bloavezh 1901.

Daoust eta ha Barzed Breiz-Vihan o deuz urz da
gaout ive beb a vouez evid hennvel brema an Arc'h-
drouiz, pegwir n'euz nemed eun Arc'hdrouiz hepken
evid ar Vreiziz euz ar bed holl ? Ar poent-ma a vezo
red d'hon breudeur ar Varzed a Vreiz-Veur studial
anezan mad, ha merchanz e vezo digaset prestik dirag
lezvarn ar Gorsedd, gant Eifionydd ar Barz-Segretour,
Sethu ama al lizer a zo bet kaset da hema gant
Taldir, Barz-Embanner Gorsedd Barzed Breiz-Vihan.

Keraez, 1/12/1905.

Anrhydeddus Gymrawd,

*Y mae Gorsedd Beirdd Gorymrys Breith-Isel yn gosyn
yn barchus os mae Gorsedd Beirdd Ynys Prydain wedi
cyfansoddi reolau ar y pwngc newydd-ma :*

*A fedr Beirdd Llydaw, y rhai sydd wedi cael eu
urddo yn ein Gorsedd-ni, yr hwn, fel ydych yn gwybod,
a gafodd nawddogaeth Gorsedd Prydain Medi 26, 1900,
trwy law-ysgrif o Hwfa-Mon ei-hwn, wedi ei ddirprwyo
gan enw Cadfan, dirprwyfardd, a fedr Beirdd Llydaw
ynte, os adwaeniant brythonaeg, etholu trwy lythyr yn
etholiadau yr Archdderwyddon ?*

*Byddwch cystal a doddi'r gofyniad-hon o flaen sedd-
fainc Pwyllgor yr Orsedd Fawr a rhoddi ateb i Bwyll-
gor Gorsedd Beirdd Llydaw.*

*Dywedwch hefyd os mae yn rhaid i ni danfon
atoch enwau a chyfeiriadau ein Beirdd urddedig.*

Yr eiddoch yn barchus,

TALDIR

Arwyddfardd G. B. G. B.

Paëroniez "RR VRO"

An Aotrou N Eskop DUBOURG. — An Aotrou Markiz ha Kannad AN ESTOURBEILLON. — An Aotrou Kannad LAMY. — An Aotrou Kannad HEMON. — An Aotrou Markiz FREDERIK A GEROUARTZ. — An Aotrou Drouiz IAN AR FUSTEK, "AB GWILLERM" — An Itron Enorus MOSHER. — An Itron Enorus ANNA A GERVENOANEL.

HANOIOU SKRIVANIERIEN "AR VRO"

Iez Gwened. — Blei Lannvau. — Bleimor. — Kelen Glaz. — Efflam Koet-Skau. — Job en Drouz-Vor. — Lociz HERRIEU (Barh labourer). — Pengleuik.

Iez K. L. T. — Jos Albaret. — An Arc'hantek. — Armel. — Ar Berr (Abalor). — Bruk. — Ar Brugger. — Charlez Ar Braz. — Barz ar Blawez. — (ar Yeodel) Bocher. — Biler (Azenor). — Berthou (Alc'houeder). — Barzik Kerglaz. — Ar C'hozik. — Ar C'horfek. — Ar C'harget. — Louisa Charran. — An Du. — Evnik Arvor. — Esnault. — Even. — Ian Ar Fustek. — Ar Farcher. — Ar Garrek. — Ar Goffik. — Ar Gall. — — Ar Gak. — Godest. — Gwennou. — H. Gwillerm. — Gouriou. — Glazardik ar Bod-dero. — Leen Ar Gourenner. — Efflam An Henoret. — Jaffrennou (Taldir). — Kerniliz. — Lunedek. — Laouik. — Meriadek. — Ar May. — L. Ar Menn. — Ian Naden. — Orain. — Pennhouarn. — Ch. Picquenard (Barz Melen). — F. R. Plouescat. — Loiz Porzikel. — Potr Ar C'hap. — Klaoda Ar Prat. — Per Pronost (Barz Treflez). — J. Ar Pelleter. — Iouen Poullan. — Renan Ar Rouz. — Jord'Ar Rumeur (Mathaliz). — Ian Roudot (Mel-oc'h-dir). — Anna-Mari Ropars. — Erwan Sebillot. — Ar Sevellek. — Tiercelin. — Iannik Ar Venaër. — F. Vallée (Ab Hervé).

MOULLEREZ AR GWAZIOU HA JAFFRENNOU E KERA EZ (Penn ar Bed)

Le Gérant: Etienne JACQ.

*Les Imprimeurs
de Goaziou - Jaffrennou*